

KIS-480 – Geriadurezh ha yezh arnevez

(GE – Devezh studi war ar c'heriadurezh aozet gant Kevrenn Yezhoù ha Yezhoniezh SKOL UHEL AR VRO e Karaez d'ar 7 a viz Here 1995).

Kudenn ar yezhoù ne c'haller mont dezhi nemet e par ar blanedenn. Bemdez e pep poent eus an Douar e vez treuzfurmadurioù. Ar bed ma vevomp ned eo ket ar stern stabil a venne gwelout hon hendadoù, met an disoc'h kemmus bemdez eus treuzfurmadurioù o c'hoarvezout paot ouzh paot, buan ouzh buan.

Ur stadadenn diac'hinek a reer : seul vuanoc'h ma emdro ar bed, seul dostoc'h ez a d'e unvanadur. Lec'hienn voutin eo diskleriañ e vez lodek ar yezhoù e treuzfurmadur ar bed – evel lec'h ha benveg an treuzfurmadur. Hogen ur goulenn n'eo ket aes respont dezhañ eo hemañ : penaos e c'hell yezhoù ken disheñvel ha, lakaomp, sinaeg, arabeg ha saozneg kemer perzh a-gevret e treuzfurmadur ar bed – bezañ a-unan evit kas ar bed d'e unvanadur ?

Ur respont eeunek e ve : ar saozneg eo hiziv keflusker kement treuzfurmadur a c'hoarvez er bed. Ar yezhoù all a ve hepken melezourioù bedoù aet da get, war un dro melezourioù ur vuhez lec'hel intret bemdez muioc'h gant ar vuhez vedel, hag er gwellañ degouezh melezourioù ar bed bev a-dreuz d'ar saozneg.

Diwar vont, merkomp n'eo ket nevez seurt respont. Heñvel arguzenn a veze enebet ouzh Dante ; en 13^t kantved e c'hoarie al latin ar roll a zo hiziv gant ar saozneg. Arguzenn na viras ket ouzh Dante a sevel e oberoù e toskaneg ha da c'henel an italianeg, bev bepred endra reer eus al latin ur yezh varv.

Tostaomp, eomp war an dachenn, o kemer an degouezh boutinañ. Pa c'hoarvez un darvoud en ul lec'h eus ar bed – e Sarajevo, e Mururoa – e vez danevellet raktal en holl yezhoù dre ar mediaoù. Disheñvel ar prezegoù dre ma vez graet an danevellad e kant ha kant yezh disheñvel. Koulskoude, daoust d'ar c'hemm bras etre ur yezh hag ur yezh all, ez eus un dra voutin : danevell an darvoud. Dre an holl yezhoù e *lavarer* an hevelep tra (komz a ran eus an darvoud nozh : “ tarzhet ez eus ur vombezenn derc'hanel d'an eur-mañ-eur el lec'h-mañ-lec'h ” ha n'eo ket eus an addisplegoù a-du pe

a-enep a glever war an divoud). Ar skouer-mañ a laka da spurmantiñ ar vezañs eus daou live, daou wastad : live ar yezhoù, lies ha liesfurm, live al *lavar*, unan.

N'eo ket hepken e par ar c'heleier e kaver an devoud. E domani ar c'halvezerezh : pa brenit ul luc'heiler, emañ al lizhad e 12 pe 18 yezh, o *lavarout* an un tra dik. Heñvel e domani ar skiant, ar vezekniezh, h.a.

Soñjet e vo emañ o forzhañ un nor digor, pa ran meneg eus ur gudenn ken kozh ha Tour Babel : hini an troerezh a yezh da yezh. Arbennet e vo ned eo mui an troerezh ur gudenn peogwir ez eus hiziv ijinenoù o ren an troerezh emgefreak. Fiziomp en unan anezho danevell saoznek seziz Sarajevo hag e taskoro dimp an hevelep danevell e galleg.

Hogen eno emañ an dalc'h : saozneg ha galleg zo yezhoù kevatal a-fet azasted diouzh ar bed a vremañ. Bewech ma ra an eil ur c'hammed war-raok e ra eben ur c'hammed heñvel : an holl gealioù – ar c'healioù meret gant ar gazetennion, ar galvezourion, ar skiantourion – a vez dezho furmoù prest da arverañ ken e saozneg, ken e galleg. Ha didenn, hep koll un eskenn stlenn, e c'hell an troerezh emgefreak tremen eus an eil d'eben.

An holl yezhoù avat n'int ket kevatal : reoù zo c'hoazh hanter hent etrezek o azasted diouzh ar bed a vremañ. A dra sur, evito e chomfe bourt an troerezh emgefreak, pe e taskorfe un destenn diglok, diresis, gant ur c'holl stlenn bras pe vrasoc'h.

E berr, evit ur yezh, bezañ azas diouzh ar bed eo bezañ azas diouzh *lavar* ar bed – o c'houzout emañ lavar ar bed, hag eñ war unelaat, o kempañ bemdez, o treiñ a-ser gant treuzfurmadurioù ar bed.

Kement-mañ hon pella diouzh meizadur struzhelour ar yezhoù : anezhañ sellout ur yezh evel un devoud naturel, ur wezenn o sunañ sabr ur c'horn douar, o kreskiñ en distro kaer diouzh ar re all, an hevelep saveleñoù hêrezhel o ren warni ha war ar vroad a ra ganti, hervez ur patrom tonket adal orin ar bed.

Anat eo, pep yezh zo enni luniadoù stabil a vez dewerzhed o hoali e kantvedoù pe gentoc'h e milvedoù¹. Padal, mar boe liv ar wirionez gant al leterc'had naturelour e

¹ Aliezik e klevan an arbennadenn-mañ : ha plas zo d'ar brezhoneg e Frañs ? Unvanet eo ar yezh er Stad c'hall ha gwiziennet eo ar galleg e Breizh evel er rannvroioù all. Respont a ran d'an arbenner emañ o veskañ ar skeulioù amzer : muzuliet e vez hoali ar Stadoù e dekvloazioù, d'ar muiañ e kantvedoù, tra ma'z eo ar mil vloaz unanenn vuzuliañ buhez ar yezhoù.

grez al luskadoù broadel, ne oufe ober meiz hiziv war doare ebet ken eus buhez ar yezhoù. Nesoc'h d'ar werc'helezh e ve lavarout ez eus gant pep yezh ur stil denel diouti, ez eo pep yezh un doare da vezañ den, kemmus, dic'hortoz, nevezus, da galon dezhi evel d'an holl yezhoù all un hevelep *lavar*, piaou mab-den.

Gwechall, eleze a-raok oadvezh ar slenn, pa veze nebeut a zarempredoù etre pobloù ar bed, e tenne al *lavar* e unded eus ar pezh a anved neuze “ natur mab den ” a dermened diwar-bouez an damantoù, heñvel gant an holl dud, d'an emvagañ, d'an emwiskañ, d'al lojeiz, d'ar revelezh, d'ar brezel, d'ar gravez, d'al *lavar* ivez, d'an arz, h.a. Heñvelled devoudel, hogos dic'houzvez, dinac'het zoken, ken lec'hiek e chome emskiant pep hini, an estren o vezañ ar barbar, an danvez enebour, a-vec'h un den.

Hiziv pa baota an darempredoù etre holl dud an Douar, pa'z a bedel tamm ha tamm emskiant ar bobloù e tiazeez an denelezh he unded, n'eo ket mui war un “ natur ”, met war ul *lavar*².

Ar gudenn evit an holl yezhoù – ha n'eo ket hepken evit ar yezhoù oc'h adsevel – eo chom spreg e dispakadur kendalc'hek al lavar bed. Heuliañ ul lavar o nevesaat afo war un dro gant treuzfurmadur ar bed ha n'eo ket heuliañ hepken, hogen perzhiañ e dispakadur al lavar.

Rak, a bouez e verkañ, ne vev al lavar bed nemet dre ar yezhoù ; drezañ e-unan n'en deus korf ebet, buhez ebet (hag an arnodoù evit reiñ dezhañ korf ha buhez ermaez eus ar yezhoù, an esperanto hag all, n'o deus bet disoc'h ebet nag e tachenn ar spered, nag e tachenn an istor). Douget emañ al lavar bedel gant ar yezhoù lec'hel. Kement kammed a ra, pep treuzfurmadur ennañ, pep nevesadur a vez da gentañ ur c'hammed, un treuzfurmadur, un nevesadur en ur yezh dibarek.

² E sternioù studi all e keveneber kentoc'h “ natur ” ha “ kultur ”, oc'h enklozañ al *lavar* e-barzh ar c'hultur. Evit ezhommoù va displegadenn, pa gomzan emañ eus yezhoù, e kavan gwell kevenebiñ “ natur ” ha *lavar* ha sellout doareoù ar c'hultur evel arvezioù eus al *lavar*. E se, prenañ e Bangkok, en Ottawa pe e Roazhon ul luc'heiler graet er Stadoù-Unanet zo ur gread a gultur, kenkoulz all ez eo ur gread a *lavar*, evel ma'z eo un arvez eus an hevelep *lavar* lenn al lizhad o vont gant ar benveg, skrivet e pennañ yezhoù ar blanedenn. Heñvel dra, ar bolodoù hag an obuzioù eskemmet etre Serbed ha Bosniiz, oberiet hervez an hevelep kalvezouriezh ma n'eo ket gant an hevelep greanti, zo arvezioù eus un hevelep *lavar*, koulz hag ar c'hevraouerezh renet gant derc'houezourion an UNO, an NATO hag ar pennoù brezel. E berr : yezhoù diseurt, ur c'hultur bed war unvanaat, ul *lavar* bed unan.

Kemeromp ur skouer. Ur c'heal a ziwanas er bloavezhioù c'hwegont er Stadoù-Unanet, a wiskas ar furm *software* en amerikaneg, a voe raktal parzh e lavar ar bed hag an holl yezhoù a rankas reiñ dezhañ ur gwisk d'o zro. An hent berrañ e voe amprestañ ar gwisk amerikan, o tistummañ tamm pe damm an distagadur. An hent all, kemeret gant nebeut tre a yezhoù, ar galleg en o zouez, e voe dibourc'hañ ar c'heal eus e wisk amerikan d'e adwiskañ gant o danvez dezho.

Zoumomp c'hoazh, sellomp dre ar munud dibun an oberatadenn diwiskañ adwiskañ, rak eno ez eus ur stign eus diorreadur ar yezhoù. Setu ur c'heal nevez o tiwanañ en ur poent eus ar blanedenn hag oc'h emledañ d'ar blanedenn a-bezh en ur ober daou pe dri bloavezh (e gwir, hiziv n'eo ket mui e bloavezhioù e vez muzuliet emled ur c'heal dre ar bed, met e sizhunvezhioù). En degouezh desellet ez emled dre ar c'halvezerezh un araokadenn e domani ar stlenneg, oc'h ober d'al lavar bed dedreiñ. Degemeret e vez seurt dedroad gant yezhoù 'zo en un doare gouzañvat : digor a roont d'ar ger amerikan. Yezherion all, goude reiñ bod d'ar ger amerikan en ur prantad kentañ, a striv da erlec'hiañ outañ ur ger savet diwar o danvez o-unan. War-benn se e kasont o labour, n'eo ket hepken war o yezh, met dreist-holl e par al lavar. Studiañ a reont ar plas hag ar roll kemeret gant ar c'heal nevez e-barzh rouedad ar c'healioù kent – penaos emañ ereet outo, pe gemmoù a lak da c'hoarvezout enno, pe zremm zo gant al lavar nevesaet dre e zonedigezh.

Evel a ouzoc'h, *software* a voe savet dre enebadur ouzh *hardware*, ger luc'hach ar stlennegourion amerikan da lesenvel o urzhiataerioù : ar "c'hinkailherezh". Da aroueziañ an doareoù d'ober gant an urzhiataerioù, eleze ar goulevioù, h.a., e savjont dre ur c'hoari gerioù an termen *software* (*soft* "dous, c'hwek" kevenebet ouzh *hard* "kalet"). Deurus eo heuliañ kammedoù ar yezhourion en o striv da erlec'hiañ ur furm a orin gallek ouzh ar ger amerikan : unan a ginnigas un daouad damblaket diouzh an daouad amerikan, a oa *quincaille* – *mentaille*¹ ; reoù all an daouad *matériel* – *mode d'emploi* ; an AFNOR, e-tro 1970, a embannas un termen kefridiel : *programmation*. Hini ebet eus ar c'hinnigadennoù ne voe avat evit distroadañ *software* a chomas en arver un nebeut bloavezhioù c'hoazh. E 1974 e voe krouet ar ger *logiciel* (enebet ouzh *matériel* evel *logique* ouzh *matière*). Berzh a reas ar ger diouzhtu ha dindan un nebeut mizioù e voe degemeret gant an holl. Perak ? Daou abeg moarvat ; an eil o tennañ d'ar skouarn : ur ger berr ha kaer, diouzh ijin ar yezh (ha ne seller ket *ciel* evel kaerañ ger ar galleg ?) ; ha dreist-holl, egile o tennañ d'ar reizh : tizhout a rae kreizig kreiz an diforc'h etre kealioù an *hardware* hag ar *software* ; hemañ a c'hoarvez eus ar

¹ Trugarez da Christian ROGEL en deus va disaouzanet er poent-mañ eus va displegadenn, o tegas din da goun ar meneg eus an termenoù gallek-se.

goulevioù, hag ar goulevioù zo ur form eus al *logique*, ar boelloniezh, ez eo aljebra Boole, diazez ar *software*, ur form anezhi.

Bremañ e vo goulennet : lakaet er-maez an taol kaer, ar gur ez eo bet krouiñ un anvad gallek evit un ijinadenn graet gant an Amerikaned, pe c'hounid zo bet diwar skarzhañ *software* ha lakaat *logiciel* en e lec'h ? Un trec'h eus ar chaovinegezh ? N'eo ket, daoust d'ar pezh a soñj ar yezhoniour italian Umberto Eco pa ra goap eus ar yezh nemeti hervezañ he deus savet un termen broadel evit *software*. Ar ger *software* n'en deus e galleg kennotadur ebet, dave ebet da reizhiad ebet er meizerezh, lakaat a ra un troc'h etre yezh ha *lavar*. En eneb, *logiciel* a ra dave diouzhtu d'al *logique*, o heñchañ ar spered etrezek anien ar *software* – o savelañ e-barzh meiz ar yezher ar c'heñverioù a zo etre an traoù – o lakaat enta al *lavar* d'ober ur c'hammed war-raok da heul ar yezh. Merkomp e voe ar galleg *logiciel* en andon ur vostad gerioù all : *progiciel*, *didacticiel*, *ludiciel* n'o doa kevatal ebet en amerikaneg – hemañ d'e dro o klask termenoù kevatal d'an termenoù gallek hag o sevel *gameware*, h.a.

Ur c'houlakadenn a ran : an dizoloadennoù graet gant gallegerion e domani ar stlenneg, dizoloadennoù o lak da zistremen an Amerikaned e meur a zomani, ha n'int ket un disoc'h diwar labour ar stlennegourion c'hall evit kaout ur yezh graet mat, o chom an nesañ gwellañ da zispakadur al *lavar*, o teluskañ dispakadur al *lavar* war dachennoù 'zo ?

Daou seurt darempredoù a vez enta etre ur yezh, lec'hel dre ret, hag al *lavar* bed :

~ ar *c'hevraokaat*, da lavarout eo ar mont war-raok en ur ser gant al *lavar* ;

~ ar pezh a anvfen an *deraokaat*, eleze evit ur yezh kas war-raok al *lavar* bedel d'he heul dre vezañ lec'h krouiñ kealioù nevez.

Ha teir stadadenn a ranker pouezañ warno :

~ hep kevraokaat n'eus ket a yezh vev : ur yezh ne vev ket diwar aspadennoù he zremeneg, marv eo endeo pa na zamant ket he arveriadeg d'he spegañ start ouzh kerzh al *lavar* bed ;

~ gant ar *c'hevraokaat* hepken e vez ur yezh o krakvevañ : ma ne oar ar yezherion nemet mont da heul ha dastum en o yezh frouezh al labour krouiñ renet dre ar yezhoù all, n'eus ket anezhi muioc'h eget diduamant ur c'hleub vakañsoù, an trivli lec'helour o pourchas dezhi da bep remziad he dornadig fideled nevez ;

~ ne vez ur yezh o vevañ da vat nemet pa vez, n'eo ket hepken o kevraokaat gant al *lavar* bed, hogen o teraokaat al *lavar* bed.

Ar c'hevraokaat n'en deus ster nemet evel sol, prienterezh hag amplegad, an deraokaat. Anezhañ hepken e komzin amañ, dre benn ma'z eo da gentañ ul labour *war* ar yezh – tra ma'z eo an deraokaat ul labour *dre* ar yezh war dachennoù en tu all dezhi.

Daou hent zo d'ar c'hevraokaat, a rin anezho an hent gorre hag an hent don :

Hent ar gorre eo hent an amprestañ furmoù,

≈ pe furmoù krai, evel *software* e galleg a-raok 1974, evel *an tele* e brezhoneg... ar skinwel ;

≈ pe furmoù kempennet evel *fioul* e galleg, *atomenn* e brezhoneg ;

≈ pe furmoù plaket evel *quincaille* e galleg ar bloavezhioù 60, evel ar brezhoneg *rakvarn*.

An hent don eo an hent a striv da dremen dre al lavar, o lezel pep furm yezhel a-gostez e-pad ur mare, evit mont d'ar c'healioù o-unan. Da ziskenn dindan an arouez etrezek ar c'heal arouezet hag ar rouedad kealioù ez eo lodek enni. Un embregadenn diaes eo, oc'h amplegañ ur gourdonadur hir, o c'houlenn ma chomfe ar spered dieub diouzh levezon ar gerioù. Dezrannet eo bet an embregadenn-se gant prederourion 'zo, e tachennoù na oant ket hini ar yezhouriezh, gant Husserl dindan an anvad *diren eidetek*, gant Merleau-Ponty o vont donoc'h, o respizañ pep keal evel ul luskad dibarek eus ar c'horf : un *anien gantaezel* na gaver da gentañ ger ebet d'he lavarout, a zeuer a-benn d'he eztaoliñ dre un hir a dastornadur, dres evel ar barzh na gav da gentañ furm ebet en e yezh da lavarout ar from o sevel ennañ – ur skouer eus hevelep tastornadur hon eus gwelet gant an arnodoù renet bloavezhioù pad evit kavout ur c'hevatal gallek d'an amerikaneg *software*.

Arabat e ve lakaat un troc'h etre an hent gorre (amprestañ) hag an hent don (krouiñ), dilenn hemañ da vat ha kondaoniñ hennezh. Kentoc'h gouzout pegoulz e tere an eil, pegoulz e tere egile.

Er gimiezh da skouer, evit envel ar molekul ez eer gant hent ar gorre, an amprest. Pep seurtad molekul zo etrezañ hag ar re all keñverioù jedoniell ha keal pep hini zo arouezet gant e zelun kimiek : an anvadoù yezhel n'int nemet skritelloù war an delunioù, ar re-mañ o vezañ an anvioù gwirion. Gant e aotre e venegin un aters a reas ouzhin Martial Ménard agentaou : mar degemerer ar Br. *pistri-* da gevatal d'an Et. *toxic-*, ha *pistrienn* a zerefe evel kevatal d'an Et. *toxin(e)* ? An Et. *toxic-* zo un termen a vevoniezh, an Et. *toxin(e)* un termen a gimiezh oc'h aroueziñ spesadoù molekul ; mar greer gant Br. *pistri-* evit hennezh e reer gant *toksin* evit hemañ.

Er penn all, er brederouriezh, ez eo strizh an ere etre keal hag anvad : emañ diazezet ar c'heñverioù etre ar c'healioù war ar c'heñverioù etre ar furmoù yezh ma teuont da lojañ. Ar brederouriezh zo ul labour graet war al lavar dre ar yezh ha dre se, dre se hepken, ul labour war ar yezh evel benveg da dreuzfurmiñ al lavar. Anat eo ez eo an hent don hent ar yezh er brederouriezh : ar yezh evel benveg d'en em zieubiñ diouzh ar yezh evit tostaat d'al *lavar*.

Kement-mañ ne vir ket yezh ar brederouriezh a amprestañ – an amprest o vezañ neuze ur benveg ouzhpenn da ren an dieubiñ. En 18^t kantved e strivas ar brederourion alaman da skarzhañ an amprestoù latin eus o yezh. E se e voe erlec'hiet al luniad alamanek *Dasein* ouzh an amprest latin *Existenz*. Kenvevañ a reas an daou dermen evel heñvelsterioù e-doug daou gantved. Betek ma teuas prederourion an 20^t kantved da reiñ mon en-dro da *Existenz*, da adamprestañ *Existenz*, n'eo ket evit e lakaat e-lec'h *Dasein*, met e-kichen *Dasein*, pep hini o wiskañ ur c'heal nevez eus ar preder. En doare-se ne voe ket an amprest un dirogadur e gwiad ar yezh, hogen un hent da binvidikaat al *lavar* dre ar yezh.

Ur skouer all, tostoc'h dimp. Er bloavezhioù 1960-1970, ar bodad tud a skrive er gelaouenn *Emsav* a zivizas ober gant ar ger *daelerezh* ha skarzhañ an amprest alamanek *dialektik* evel m'en arvere Hegel ha Marx. Bep ma kasjont o obererezh ha ma emdroe o speredoù avat e teujont da verzhout e pellae ar pezh a anvent *daelerezh* diouzh *dialektik* ar varksourion. Ken e stagjont d'ober gant ar ger *dialektik* en-dro o strishaat e ster d'an diskiblezh varksour ha da lakaat spis war wel an diforc'hioù hag ar c'heñverioù a oa etre an daou geal.

Setu divrazet emichañs an daou zoare da ren an amprestañ :

~ an *amprestañ dre zic'halloud* : plantañ gerioù diwriziennet eus ur yezh all e-barzh douar krin ur yezh toc'hor, o sankañ enni ur c'hontamm ouzhpenn d'he lazhañ ;

~ an *amprestañ e-ser krouiñ* : imboudañ furmoù o tougen kealioù bev e- kreiz broñsoù puilh ha leun a sabr ur yezh war ziorren.

GOULENNOÙ

Gwenael EMELYANOFF : Komz a rit eus an amprestañ er Gimiezh. Hag evit ar skiantoù all ?

Kemeret 'm eus an div skouer bellañ : Kimiezh ha Prederouriezh, hag er Gimiezh, anvioù ar seurtadoù molekul, a zo 600 000 pe ur milion anezho. Koulskoude, n'eo ket pa ve ur milion a c'herioù nevez da grouiñ ez amprester an termenoù etrevroadel. Da nebeutañ, n'eo ket hepken. Met dre benn ma'z eo o delun jedoniell anvadoù gwir ar molekul ha ma'z eo o anv yezhel ur skritell hep-mui war an delun jedoniell, arveret da aesaat ar prezeg.

Diwar an ampoent ma'z eus kealioù digor, eleze gouest da c'henel kealioù all – hag o anaout a reer dre ma vezont alies kreizet war ur verb – e sav ar gudenn : amprestañ pe krouiñ ? Ne c'haller respont da seurt goulenn nemet war an dachenn dre blediñ ouzh pep degouezh dibarek, an disentez o tont bepred digant ar yezherion o-unan. Gwelet hon eus penaos e vouzhas ar c'hallegerion ouzh goveliadennoù o yezhourion keit n'o devoe ket ar re-mañ gwell da ginnig dezho eget *mentaille, mode d'emploi* pe *programmerie* hag an degemer prim hag unvan a rejont da *logiciel*.

Martial MÉNARD : Petra zo d'ober evit stankañ an hent ouzh ar re a zo o kas distruj er brezhoneg ha dreist-holl e brezhoneg ar skolidi dre ledañ ar pezh a anver an etrevroadeg ?

Petra d'ober ? Da gentañ, ren ur prederiañ fraezh war ar c'hudennoù o sevel gant diorreadur ar yezhoù dre vras, diorreadur ar brezhoneg ent dibarek, ar pezh a'm eus klasket ober hiziv. D'an eil, pourchas dafar yac'h d'ar yezh : embann geriadurioù c'hoazh a dra sur, ezhomm zo anezho. Dreist-holl embann skridoù, levrioù ha kelaouennoù, labourioù orinel ha n'eo ket hepken plakadurioù diwar ar pezh a gaver er yezhoù all, eleze kinnig d'ar vrezhonegerion testennoù o broudo da vezañ kenderc'herion, nevezherion, krouerion un danvez kefredel hag arzel na vo kavet e nep lec'h all.

Bevañ a reomp e meur a yezh. Unan eus emdroadurioù bras ar bed eo e teu holl annezidi an Douar da vezañ div- ha liesyezher. E grez *Gwalarn* e veze unan eus dodennoù ar stourm evit ar brezhoneg : “ lazomp ar galleg pe eñ hon lazho ”, hervez frazenn Roparz Hemon. Abegoù en doa moarvat d'he distagañ en e amzer. E dibenn ar c'hantved ez eus kemm d'ar saviad. E-lec'h bezañ an nemedenn e tenn al liesyezhegezh da reolenn dre ar blanedenn a-bezh. Ned in ket betek lavarout ez eus eno un azon e sav live ar sevenadur ; un testeni eo evelkent ez a war baotaat an araezioù kefredel lakaet e kerz an holl. Rak korvo zo da c'hounit gant an diforc'hegezh etre ar yezhoù a gomzer, gant liested an hentoù a bourchasont d'ar spered evit diraez an traoù ha perzhiañ er vuhez ha seul vrasoc'h korvo ma'z a brasoc'h ar pellder etre ar yezhoù. Pe c'hounid da c'hortoz avat mar bez an eil yezh ur plakadur diouzh eben. Kentoc'h eget deskiñ d'ar

skolidi ur parlant na ouzer ket ha brezhoneg eo mastaret gant galleg pe galleg mastaret gant brezhoneg, e vije gwell o c'heleñn war-eeun dre wir yezhoù, lakaomp galleg ha saozneg.